



Tro ha
Distro



Programm ar rummad troiñ

Ne dalv ket ar skrid-mañ e « gwenedeg » e vo graet get ar rannyezh-se e-pad ar sizhun, nag e vo digomprenabl ar stummour !

1. Paliou ar rummad

En un endro divyezhek, mand eo kreñvoc'h ur yezh evit egile, ni 'bez afer dalbezha a droiñ ag ar yezh kreñvañ, ha pa vehe termenoù o-unan lies-mat, ma faot deomp implijiñ ar brezhoneg àr ar pemdez.

Ar ble-mañ e vo kanniget labourat àr un destenn c'hallek a blede get **ar fromoù**. Pleustret e vo èl-se àr ar labour **termenografiezh**, a vez afer anezhoñ evit **troiñ**, hag evit komz ha skriviñ a-ziàr a bep sort danvez er vuhez pemdez ivez. Soñjit, da skouer, e tud aterset er radio ha ne ouiont ket geriaoueg o zachenn e brezhoneg. Rannet e vo an destenn etre ar berzhidi evit ma vehe troet ur lodenn get pep unan. Klasket e vo adlenn an troidigezhioù a-bezh hag evit ur lodenn anezhe d'ar bihanañ, a-stroll.

- Gober anaoudegezh get an dermenografiezh hag an troiñ dre vras : talvoudegezh, feson d'ober ha c'hoazh.
- Pleustriñ àr termenoù ar fromoù hag an troiñ, get un destenn a-ziàr an danvez-se ivez.
- Gwellaat e ampartiz da droiñ ha da skriviñ e brezhoneg get an evezhiadennoù a vo graet àr e labour adlennet.

2. Piv ?

Stummour : David ar Rouz, get sikour kelennerion arall àr ar lec'h evit adlenn an troidigezhioù.

Digor da : razh ar vrezhonegerion adal ar live B1-B2.

3. Feson da labourat ha talvoudegezh

E penn kentañ ar sizhun e vo em soñjet a-stroll àr petra eo ar labour troiñ hag e vo kanniget ur feson d'ober ha benvegoù d'aoziñ ar labour-se.

Goude e vo labourer get pep unan àr un tamm ag an destenn a vo kanniget mes gellet a rahet labourat a zaou (pe oc'hpenn) ivez, é ranniñ ar renabliñ, ar c'hask, ha razh. Aozet e vo prantadoù « bilañs » da c'houlenn o soñj get ar re 'rall.

Diàr ar sizhuniad labour-se e vo desket ur feson da zibab troidigezhioù evit termenoù, hag an dra-se a servij àr ar pemdez e brezhoneg. Evit lod e vo talvoudus oc'hpenn evit o micher, ma labouront e brezhoneg, lakaomp, pe ma faot dezhe gober ha ne gredont ket a-gaoz d'ar c'heriaoueg arbennik a vank dezhe.

4. Degasit geneoc'h...

Un **urzhiaer** hezoug ma 'peus unan, get ur skridtreter (hag un taolennet).

Geriadurioù :

- geriadur an Here m'ema geneoc'h : talvoudus-bras eo ;
- ur geriadur divyezhek hollek àr baper a c'hello bout talvoudus ivez, na bout e kaver geriadurioù a sort-se enlinenn ;

- geriadurioù divyezhek hollek rannyezhel ma faot deoc'h chom stag doc'h ur rannyezh bennak ;
- geriadurioù arbennik àr an danvez, mar kavit anezhe.

Ur listennad geriadurioù a gavehet er bajenn « Geriadurouriezh ar brezhoneg » e Wikipedia : https://br.wikipedia.org/wiki/Geriadurouriezh_ar_brezhoneg hag e Tro ha Distro : http://www.trohadistro.com/brezhoneg/teskadou_yezh.html.

Ur **yezhadur** a vez talvoudus ivez lies.

ANV :

Lennet em eus programm ar c'hentelioù **TREIÑ DIWAR TESTENNOÙ TEKNIKEL** ha kadarnaat a ran va dibab da heuliañ ar rummad kentelioù-se bemdez, eus 9 eur da 12 eur diouzh ar mintin hag eus 2 eur da 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.